


HEKLEV SEVENADUREL

	A-dreuz lenn	2
	Petra nevez ?	7
	Notennoù	22

Herve LATIMIER

**Revenge of the
Stormbringer, A Sister
Fidelma Mystery,**
gant Peter Tremayne,
Headline, 2024,
349 pajenn, £10.99



Pevare levr ha tregont o kontañ avanturioù Fidelma a Gashel. *dálaigh*, alvokadez ha barnerez-enklaskerez er sistem gwir a rene en Iwerzhon er VII^{vet} kantved c'hoazh. Emeur e kastell roue Muman, Colgú, breur Fidelma. A-benn nebeut e vo dalc'het ur foar vras en enor da Colgú hag ar briñsez Gelgéis a Durlus Éile, nevez euredet. Kavet e vez korf

ur gadourez yaouank eus gward ar briñsez e-kichen kambr ar c'houblad hag e varv merourez ar c'hastell bet ampoezonet. C'hoarvezet eo pep tra en ul lec'h na c'haller na mont ennañ na de guitaat hep tremen dirak ur gward, ar *sanctuary* bet savet nevez zo evit gwareziñ ar roue diouzh ar vuntrerien...Ret eo da Fidelma hag Eadulf diskoulmañ

an afer ar buanañ posupl abalamour d'ar foar. Heuliañ a reer an enklask hag e gammdroiou betek ma tisplegfe Fidelma pep tra dirak ul lez-varn, evel da gustum. Savet eo an istor war ur patrom anavezet gant lennerien feal enklaskoù Fidelma.

Ar wech-mañ, war dachenn an endro istorel, e pouez Peter Tremayne war un hengoun o vont da get, hini ar bagadoù kadourezed evel gward ar briñsez, *The Daughters of the Storm*. Ur santi-mant a hiraezh am eus santet a-hed an istor abalamour d'ur bern perzhioù eus ar gevredigezh geltiek iwerzhonat o steuziañ dindan levezon ar feiz kristen ha dreist-holl dindan levezon brasoc'h-brasañ sell Roma war an doare d'he bevañ. P.255 e tamall Fidelma Sant Padrig evit e roll en afer : « *We were taught the Faith long before the Uí Néill in Ard Magh started to make claims about the teaching of the Briton, Maewyn Succat, who was arrogant enough to claim to be patrician or aristocrat of Rome and even adopted the name Patricius*¹. » Eus e du e


1 « *Kelennet e voe deomp ar Feiz pell a-raok ma krogas an Uí Néill en Ard Magh da vrudañ kelennadurezh ar Breton, Maewynn Succat, hag a oa otus*

seblant Eadulf, pried Fidelma, bezañ lakaet diaes gant e blas er gevredigezh. Krediñ a ra bezañ gwelet bepred evel un estren hep talvoudegezh, ur « c'hi glas² ». Tizhet eo gant kleñved ar vro. Un dra un tamm divoutin evit unan renet peurliesañ gant ar poell : diskouez a ra Fidelma donder he c'harantez evitañ betek kinnig dezhañ aozañ ur veaj betek e vro. E frazennoù diwezhañ al levr e santer ez eo nec'het gant ar veaj-se hag en em c'houlenn hag-eñ e oa un diviz mat eus he ferzh. Nec'hamant dirak ar c'hemmoù a wel o tont ? Danvez ul levr nevez ?

a-walc'h evit lâret e oa ur patrisian pe brientin eus Roma, betek kemer Patricius da anv. »

2 p.59 « *In this land called a cú glas – a grey dog – the term for an alien. » Ne gavit ket ez eo gwall heñvel eus “ki glas” ha gant ar memes ster ?*

La société qui vient,
dindan renerezh
Didier Fassin,
Le Seuil, 2022,
1329 fajenn, 29€.



Ul levr tev eo *La société qui vient* ! Bihan e lizherennoù ha fin e bajennoù... Met kentelius-kenañ.

Un digoradur a 64 fennad a ya d'en ober. En digoradur gant Didier Fassin, « *Un moment critique* », em eus kavet dedennus an diforc'h a ra etre “enkadenn” ha “prantad enkadennek” (pe “eizik”, hervez Martial Ménard). Enkadennoù a bep seurt a vez meneget hep ober bepred al liamm etrezo. Gouzañvet e vez an enkadennoù peurliesañ. Ar prantad enkadennek a zo ur prantad ma verzer ez eus un digempouez reizhiadel o tont hag e c'heller stourm a-enep pe, d'an nebeutañ, emazasaat outañ. Ur sell troet war an ober ma n'eo ket bepred gwellwelus. Unan eus perzhioù al levr eo ez eo pep pennad distag, pep hini o plediñ gant un danvez resis.

Echuiñ a ra pep pennad gant ur c'hlozadur a sikour da gompren preder an aozer. Gellout a reer lenn anezho d'e lusk hag e forzh peseurt urzh. Savet int holl gant skolveuriz ; danvez a-feson peurliesañ daoust d'an tech da glask pemp troad d'ar maout en ur yezh diaes da gompren ur wech an amzer. Seizh lodenn a gaver : « *Enjeux* » (nav fennad) ; « *Politiques* » (unnek pennad) ; « *Mondes* » (unnek pennad) ; « *Inégalités* » (nav fennad) ; « *Reconnaisances* » (unnek pennad) ; « *Explorations* » (seizh pennad) ha « *Libre cours* » (c'hwec'h pennad). Skrivet eo bet ar pennadoù goude prantad ar c'hovid evit an darn vrasañ, dalc'het e vez kont eus an darvoud-se alies. Diaes e vefe din menegiñ an holl bennadoù o deus plijet din rak kalz a zo. Un dra a bouez koulskoude : ar

preder a gaver e meur a bennad war veiziad an “hollvedel” diazezet war an diforc’hioù. Da skouer, p.856, pennad 46 : « *La critique de l’universel que les élites prennent comme un affront s’appuie sur la distinction que le philosophe Souleymane Bachir Diagne énonce entre un “universel de surplomb”, polarisé, vertical et un universel “latéral”, décentré, horizontal.* » Dave a vez d’ur meiziad nevez : « *pluriversel* ». Ur skouer all : pennad 51, p.931 : « *Si le rationalisme des Lumières est attaqué, c’est parce qu’il est aveugle aux différences et que*

l’universalisme que ces dernières défendent est faux, hégémonique et violent, les principes prétendus généraux qu’elles invoquent leur servant à imposer un mode de vie et asservir les autres cultures et les autres vivants. » Seurt prederiadennoù a gaver e meur a bennad disheñvel o danvez.

Ne lârin ket deoc’h em eus lennet al levr e berr amzer met aliañ a ran e lenn rak degas a ra titouroù ha danvez preder e-leizh. Arabat ankouaat ez eus levraouegoù ma c’heller e amprestañ...

**Contre le cléricalisme,
retour à l’Évangile,**
gant Yves-Marie Blanchard,
SALVATOR, 2023,
137 pajenn, 16€



Bet kelenner en Ensavadur katolik Pariz ez eo Yves-Marie Blanchard, beleg eus eskopti Poitiers, arbennik war ar Bibl. Implijout a ra e ouiziegezh war ar yezhoù mèo bet skrivet an testennoù evit kinnig ur sell

nevez warno, war lizheroù Sant Paol peurgetket. Anat eo en titl ez eo ar stourm a-enep d’ar gloerelouriezh pal pennañ an arnodskrid. An hent nemetañ evit lakaat an iliz da gemm eo, hervez an aozer. Tremen eus

ur framm ha doareoù divizout kreizennet hag urzhazel d'ur framm ha doareoù "senezel"¹ : kevatalted, diviz, breuriez... P.113 e ro an aozer ur seurt diver-rañ eus e ginnigoù : breudeur ha c'hoarezed nemetken, "tad" ebet ken ; en tu-hont d'an Daouzek abostol niverus ha disheñvel ; paotred ha merc'hed kevatal ; da gentañ tud uvel gant ur galon a baour ; ket renerien gant c'hoantoù a verourien met pastored simpl, tost ouzh an dud hag emroüs e-keñver pep hini. « Na rit ho Tad eus den ebet » (Mzh 23,9) ; « D'ar sent ha breudeur feal er C'hrist » (Kol 1,2) ; « Daouzek, a anvas ebestel ivez » (Lk 6,13) ; « N'eus na gourel na benel » (Ga 3,28) ; « An hini bihanañ en ho touez, hennezh eo an hini brasañ » (Lk 9, 48) ; « Bez mesaer ma dañvadezed » (Yn 21,16) ; « Ha bremañ davit ar senezelezh... »

Sklaer a-walc'h eo an titloù bet dibabet gant Yves-Marie


1 Dibabet em eus ar ger-se evit *synodalité* ; troet em eus an titloù hervez troidigezh Yves-Marie Blanchard diwar ar gresianeg evit chom an tostañ posupl ouzh ar pezh a fell dezhañ degas... Tamall a ra alies ouzh troidigezhioù zo da vezañ kammet ster ar skrid...

Blanchard evit seizh chabistr e arnodskrid. Ur meneg ispisial koulskoude evit ar pezh a lâz a-zivout plas ar merc'hed en Iliz. P.36 e kaver daveoù levrioù niverus war an danvez-se. Pp.54-55 e c'heller lenn : « *Il en résulte notamment l'impossibilité de concevoir l'appel de femmes au ministère ordonné, sous prétexte que non seulement Jésus mais également les Douze étaient des hommes, au sens masculin de l'expression.* » Displegañ a ra e soñj en un doare ledanoc'h er pevare chabistr, evel-just. E fin ar chabistr-se, p.68, e c'heller lenn : « *Puisse la reprise de ces propos² longuement mûris – et toujours actuels, me semble-t-il – aider l'Église catholique à avancer dans sa réflexion sur l'accès féminin tant aux responsabilités qu'aux ministères eux-mêmes !* »

Ul levrig a bouez evit ar gatoliked prederiet gant emdroadur o Iliz met ivez evit ar re a fell dezho kaout un tañva eus doareoù soñjal disheñvel diouzh an hini "ofisiel" e diabarzh an Iliz hec'h-unan...


2 Diwar-benn dielfennadur testennoù an Testamant Nevez...

PETRA NEVEZ ?



**Tudual HUON,
Herve LATIMIER,
Loeiza an DUIGOU &
Malo BOUËSSEL du BOURG**

D'an emgann, Morvan !,
gant Herve ar Gall,
An Alarc'h Embannadurioù,
144 fajenn, 10€



Ur romant istorel a ginnig deomp Herve ar Gall, diwar-benn ur prantad nebeut anavezet. E 818 emaoamp, e Bro-Boc'her. Morvan, Roue ar Vretoned, en deus tizhet kevreañ ul lodenn vras eus tierned Breizh. Daeañ a ra Loeiz an Deol, impalaer ar Franked. Ne fell ket da Vorvan

sujañ outañ na paeañ truj ebet dezhañ. Ne fell ket da bennoù Iliz Breizh, kennebeut all, dege-mer reolenn sant Benead en o manatioù, e plas hini Koulman. C'hwitañ a ra kefridi diplomatek an abad Witkar, kannad ar Franked. Ne chom ken un diskoulm : an emgann. Trec'h e vo ar

Vretoned er penn kentañ, betek ma vo lazhet Morvan gant ur c'hadour frank. Sed an drektalenn istorel.

Treut eo an dielloù evit lavaret gwir : ur ganaouenn er Barzhaz Breizh, un dezrevell gant Ermold an Du en enor d'ar Franked... Diwar ar mammennoù dister-se en deus klasket Herve ar Gall sevel ur skrid feal d'ar pezh a ouzer bremañ a-zivout an amzerioù-hont. Feal pe gwirheñvel, pa ranker ijinañ ar pezh n'eo ket testeniekat rik. Temzoù-spered kreñv hag emgannoù birvidik a vez livet gant Herve ar Gall. Ha livet kaer ! Displegañ a ra ar rag hag ar perag gant aked bras. Ober a reer anaoudegezh gant Nevenoe yaouank, kinniget evel mab Morvan ha danvez Roue. Ur c'houlakadenn istorel... Evit pebrañ ar geusteuenn e vrastres an aozer tudenn Berc'hed, un achantourez a ro c'hwistantinoù d'ar Roue mare-mare ha d'e vreur an Abad-Eskob Gourc'hant zoken, a-raok ebatal ganto. Dieupoc'h ar vuhezegezh en amzer-hont a-hervez. Ha c'hoazh...


Levr Herve ar Gall am eus lennet gant debron gouzout ha dudi, bezañ ma n'eo ket disi.

Stambouc'het eo frazennoù zo gant re a vunudoù, en doare ma teu da vorzañ lusk ar vuhez. Diaes eo bet d'an aozer, marteze, herzel ouzh ar c'hoant da gargañ an tudennoù gant titouroù fonnus. An istorour a glask bezañ klok tra ma klask an arzour bezañ bev. Ha n'eo ket aes o unvaniñ. Kresket eo ar santadese, moarvat, gant ment bihan al lizherennoù. N'ouzon ket perak eo techet an embannerien, hiziv an deiz, da beurleuniañ ar pajennoù gant linennoù hir, skrivet bihan. Dre forzh espern paper e teu da vezañ diaes da lenn. Embannerien, ne 'z a ket ho lennerien war yaouankaat !

Un dra zedennus c'hoazh a vez lakaet war wel gant Herve ar Gall : roll politikel ar varzhed. Ganto e vez goveliet mitologiezh an harozed. A-drugarez dezho n'eo ket prest da vervel levezon Morvan e kalon ar Vretoned !

MBdB

**An amzer grenn,
gant Joel Donarzh,
Al Liamm,
72 pajenn, 7€**



Gant *Al Liamm* e oa bet embannet levr kentañ Joel Donarzh ar bloaz-mañ.

An amzer grenn a zo un heuliad danevelloù a gemmesk prantadoù buhez tud ordin er bed a-vremañ gant lajadoù skiant-faltazi. Rannet int dre chabistroù : « Ac’hane », « Alemañ », « Bremañ » ha « Warlerc’h ». Diaes eo bet din kavout ma lod, pa ’m eus poaniet da gaout fromoù. Partiet e oa mat koulskoude, gant tro-spered fentus an danevell gentañ.

A-wechoù e kaver skeudennoù kreñv, gant frazennoù a blant kerkent santadurioù evel « un didrouz ken pounner ha c’hwezh ur c’helan nevez-diarchedet. »


Danevell « Ar skoulmañ peoc’h » am eus kavet dedennustre a-fet stumm. Al lusk lakaet gant an niver a vuhez e

pennlizherennoù a ro lusk prim ar c’hoarioù video. Hogen, blaz ar c’hasoni a zo evit ar yaouankiz, trenkted e-keñver ar bed a-vremañ hag ar vuhez dre vras.

N’on ket bet tizhet gant bed Joel Donarzh, met gwell a se rak anat e vo plijadur gant lennerien all. Hag evit echuiñ war un notenn vat e rankan anzav, memes tra, e vez roet ur plas d’an dud ordin, da dud ar bobl. Al levr-mañ a vez lennet buan hag aes, en un tenn evit ar re vennetañ.

LaD

Atlas ar bedoù faltaziet,
gant Kristian Goindin
ha Jerom Olivry,
Al Liamm,
56 pajenn, 29€



Emañ un darn eus an Hobited o chom e Bro-Gerne. Sed aze ar pezh a c'hellit deskiñ o lenn *Atlas ar bedoù faltaziet*. Met a-raok mont da glask war-lerc'h ar boblañs blijus-mañ, dav eo deoc'h gouzout n'eo nemet an hevelep anv bro, hag e rankoc'h beajiñ er C'hreizdouar evit kavout anezho.

Dre chañs, n'ho peus ket ezhomm a basporzh evit kantren war zouaroù ijinus Tolkien.

E miz Here e oa bet embannet levr nevez Jerom Olivry ha Kristian Goindin, ha ken bras eo e vent ma c'heller soñjal o deus krouet un nor a zigor war ar bedoù hud.

Estreget hunvreal a ginnig al levr-mañ, rak deskiñ a reer ur bern traoù diwar-benn deroù hag emdroidigezh ar *fantasy*. En diabarzh e kavoc'h renabl skrivagnerien ha skrivagnerezed meur ar fantazi gouronel (*Heroic fantasy*). Pep a boltred a zo bet savet, o kemmeskañ ar vuhezskridoù gant al levezonoù lennegel ha sevenadurel. E-giz-

se e ouier e oa bet mojennoù Kêr-Iz hag ar c'hur arzhuriek eiennoù awenus evit un darn diouto.

Gant e livioù dous hag e dresoù kendeuzet, stil an arzour a lak da soñjal e golo kentañ *An Hobbit*, savet gant Tolkien e-unan. Ar blaz "mod kozh" bet dibabet evit an oberenn-mañ a zo feal d'ar skeudennoù *fantasy* kentañ.

N'eo ket un Atlas hepken. Ur c'harned beaj an hini eo. Skeudennaouet eo gant kartennoù ar broioù meneget, ha tresadennoù eus ar gweledva evel pa vefent bet tapet war an tomm gant un ergerzhour kurius.

Gwelet e vez splann karantez an daou aozer evit ar rann lennegel-mañ, ken m'eo deus keme- ret perzh er c'henkrouiñ, o voueta ar c'hartoù gant munudoù poel- lek pa ne oa ket puilh an taolen- nadurioù er skridoù. Hogen, n'eo ket karantez dall, ha ne dav ket Jerom Olivry war an danvez trubuilh a gaver e oberennoù skrivagnerez-mañ 'r skrivagner,

pa vez mennozhioù gouenelour pe revelour da skouer.

« Treuzkas mennozhioù ha prederiadennoù diwar-benn Mab-den », hag ivez diwar-benn « hor c’hevredigezh hag he sioù », sed aze ar pezh a c’hell ober al lennegezh-mañ.


Brasañ sotoni ma buhez,
gant Evelyne Brisou-Pellen,
brezhoneg gant
Mark Kerrain,
skeudennaouet gant
Loïc Schwartz,
Sav-Heol,
132 bajenn, 7€

Anavezet eo Evelyne Brisou-Pellen gant al lennerien yaouank. Berzh bras a ra he levrioù, ken evit ar re vihan, ken evit ar grennarded. Pemp eus he levrioù a c’heller lenn e brezhoneg. Romantoù istorel ha faltaziek a blij dezhi sevel peurvuiañ. Soñj mat am eus eus ar blijadur am boa bet gant *Pemp Skoed a Vreizh*, embannet gant *Al Liamm* e 2006. Gant gwir abeg eo bet lakaet Evelyne Brisou-Pellen da brezidantez saloñs levrioù Karaez, neuze, pa oa gouestlet ar saloñs

Al levr arbennik a blijio d’al lennerien ha d’al lennerezed sot-pitilh gant ar fantazi gouronell. Pa vefent brezhonegerien pe get, an objed-levr a c’hell ivez kavout e blas en dastumadegoù.

Emañ Nedeleg o tostaat, hag ur prof brav a zo d’ober !

LaD



d’al lennegezh evit ar re yaouank er bloaz-mañ.


Buhez Arzhur kontet gant Arzhur a ya d’ober *Brasañ sotoni ma buhez*. Nemet... ur c’hi yaouank eo Arzhur. Astenn a ra ar gaoz war an holl sotonioù en deus tro d’ober er familh emañ o vevañ ganti. Arzhur a daol ur sell eeunek war e endro. Ne gompren ket ar pezh a vez rebechet outañ, peurliesañ, rak n’intent ket mat perak e vez disheñvel ar reolennoù buhez pa vez kont anezhañ. Peadra d’en em soñjal a-zivout an diforc’h

etre an dud hag al loened... Un dodenn gempred, ma 'z eus ! Alese darvoudoù hag evezhia-dennoù leun a fent. Ur soton grevusoc'h eget ar re all en deus graet Arzhur avat hag en ur gwall blegenn en em gav...

Daoust ha chom a raio bac'het e vuhez-pad ? Al lennerien yaouank, adalek eizh vloaz, a vourro, sur ha n'eo ket marteze, o c'hortoz ar respont...

MBdB

Frank Caro, eus Gouezeg da New York,
gant Gwenael Maze,
Embannadurioù Aber,
115 pajenn, 12€



Iskisat planedenn... Penaos e teuas ur c'houer yaouank, dizesk ha diarc'hant, da vezañ un arbennigour eus hendraezoù sinaat, doujet ha brudet dre ar bed a bezh ? Eus Gouezeg e teue Frank Caro. Mab ur charretour e oa. Broudet gant ar c'hoant da ren ur vuhez gwelloc'h ha « roget gant an dianav », marteze a-walc'h, e tivroas Frank Caro d'ar Stadoù-Unanet, e deroù an XX^{vet} kantved, evel kalzik eus e genvroidi. Degemeret e vezent en o familh du-hont, a-raok kavout fred hag en em staliañ war o zra. Dre ar skouer hep e bar-se e tiskouez deomp

Gwenael Maze penaos e yae en-dro filierenn ar Vretoned paour a dreuze ar meurvor. Ne oa ket re ziaes kavout labour, d'ar mare-se, pa oa ar greanterezh en e gresk en Amerika, war batrom Michelin e Milltown, skoret gant marc'had ar c'hirri-tan. Skouer ar *self made man* amerikan eo Frank Caro neuze. Deskiñ a reas ar vicher e-ser an Aotrou Loo. En em stummañ a reas ouzh ar stern, betek daremprediñ an Amerikaned pinvidikañ ha galloudusañ. Danevell Gwenael Maze a zo savet evel ur gwir enklask. Dedennus-kenañ eo e levr a-fet

istor, sokiologiezh hag avantur... Graet en deus an oazer e vad eus andonioù tost d'e benndudenn, dre hanterouriezh Yeun ar Gow, pergen, a-drugarez d'e eñvorennoù skrivet (*E skeud tour bras Sant Jermen*¹) pe dre gomz kenkoulz all, bennozh d'e liam-moù familh gant ar skrivagner-se. Eizh stagadenn en deus ouzhpennet an aozer ouzh e zezrevell, tennet, peurvuiñ eus
1 Al Liamm, 1978

Ul levr,
gant Hervé Tullet,
Bannoù-Heol,
60 pajenn, 12,50€

Ul levr, ya met unan dibar ! Aozet diwar rontoù livioù nemetken. Ul levr a doucher e bajennoù evit lakaat anezhañ da sentiñ. Ul levr etrewezhiat¹ neuze. N'eus ket ezhomm a skrammoù evit lakaat ar vugale da ziskouez intrudu. N'o deus nemet ober diouzh ar bedadenn skrivet e traoñ pep pajenn : « Pouez war ar ront melen-mañ ha tro ar bajenn... » Ha pa dro ar bajenn e kav ar bugel daou ront melen. Ur seurt hudour e teu da vezañ. Bewech e c'hell al lenner

1 interactif

testenioù Yeun ar Gow. Sklaer hag dafaret sonn eo labour Gwenael Maze, evel boaz. Dre lenn *Frank Caro, eus Gouezeg da New York* e kenloder buhez ordinal ha dreistordinal an divroidi hag e komprener gwelloc'h, marteze, perak eo digor spered ar Vretoned war ar bed bras.

MBdB



yaouank muzuliañ e c'halloud war ar bajenn a zeu. Ur c'hoari eo. Pouezañ, c'hwezhañ, hejañ, kosteziñ, stouiñ... Ur c'hoari souezhus, fentus ha barzhonius. Peadra da zesachañ ar vugale (adalek daou vloaz betek... oad an tadoù-kozh moarvat !). Ha dre-se deskiñ frazennoù berr ha frammet mat. N'eus ket gwelloc'h eget liammañ an ober ouzh ar c'hoari evit enkounañ. Berzh a raio al levr-mañ, sur ha n'eo ket marteze.

MBdB

Poentoù diflach,
gant Emil Granville,
Embannadurioù ar Peniti,
197 pajenn, 15€¹



Gant *Poentoù diflach*, mein-touch ha mein-bonn anezho war-glask dazont Breizh, e kendalc’h Emil Granville e brederiadenoù boulc’het gant *Komzoù dichipot*, bet embannet e 2023. Triwec’h chabistr a ya d’ober an dastumad nevez, war ar memes patrom. Pennadoù politikerezh ha sokiologiezh ez int, intret gant prederouriezh. Degas a ra Emil Granville ur savboent hollvedel ha breizhek war ar memes tro. N’eo ket fonnus al levrioù mennozhioù, en tu all d’ar skridvarnerezh, a c’heller lenn en hor yezh abaoe *Ur Breizhad oc’h adkavout Breizh...* Soñjal a reer e Maodez Glanndour, Per Denez, Youenn Olier, Gwenael Maze... N’int

¹ Da urzhiadiñ gant : Embannadurioù ar Peniti, Emil Granville, Ar Peniti /L’Hermitage, 35600 Redon. Mizoù kas : 3€ dre levr.

ket gwall niverus. Biskenn eo, rak ar mennozhioù eo a ra diouer deomp, hervez an aozer, evit « kavout un emglev hollek hag a vefe war un dro sevenadurel, politikel hag antropologel ». Meur a wech e vez eztaolet gantañ e zipit e-keñver an Emsav breizhat : « mard eus anezhañ c’hoazh. » « Sac’het eo an emsav politikel abaoe pell gant an diaes ma vez kaout ur sell hollek war emdroadur ar gevredigezh a-vremañ ».


Gouestlet eo *Poentoù diflach*, neuze, d’an temoù kempred en em zrailh ar gevredigezh en o zivout : blasfemiñ pe get, ar ouel islakek, ar robot hag an dud, Mab-den hag al loened, toull-bac’h ar ger “kilstourmer”, an tiegezhioù unkar, ar galloud prenañ, an dreuzdenelouriezh... Teurel a ra Emil Granville muioc’h a gred war ar realpolitik

eget war ar santimantou mat, hervez patrom Max Weber, a ebebe divezelezh an atebegezh ouzh divezelezh ar gredenn². Gant se e teu dielfennadoù poellek gantañ peurvuiañ, diwar sifroù, daveoù sklaerius ha terminadurioù resis eus ar ger-mañ 'r ger. Dre forzh bezañ fur e c'hoarvez gantañ borniañ kizhier dall evelkent, pe chom war dachenn an hetoù hep avan-
2 *Ethique de responsabilité versus éthique de conviction*

turiñ war dachenn ar c'hinnigoù pleustrek. Boued spered a gaver o lenn *Poentou diflach* koulskoude. Displeget fraezh e vez ar meizadoù hag e fin pep chapistr e kaver un diverradur eus ar "poent diflach" studiet, heuliet gant listenn verr ar gerioù diaes. Peadra da zivouedañ e benn evit breutaat ha neket tabutal...

MBdB

Feg-Niouz,
gant Jean-Claude Le Ruyet,
Skol Vreizh,
250 pajenn, 15€



Feg-niouz, ya, rak « hiziw e vevomp en ur bed n'heller gouied piw a lâr ar wirionez ». Plas d'an ijin ha d'ar faltazi neuze, rak ar c'hronikennoù a ya d'ober dastumad Jean-Claude Le Ruyet ne lavaront ket bezañ fur na poellek : « el levr-mañ, henn touiñ a raomp, ne vo kavet nemed traoù faos, koñchennoù diwanet en ur spered douget da

guitaad ar bed-mañ, ken ankenius, evid mont da c'haloupad divrid e pradouier divent ar faltazi ». Ha perak 'ta ar barrad follentez-se ? Abalamour d'ar c'hovid, a voe kaoz e voemp holl bac'het en hon tier, evel deñved. Peadra da dreñ da foll ! Ezhomm a oa da vourdal, kuit a vegañ soñjoù du. Ouzhpenn-se, n'helle ket an aozer ober war-

dro e rubrikenn sine war ar sizhunieg *Ya !*, pa oa serret ar salioù du... En ur soñjal e lennerien *Ya !* eo, neuze, en deus bet c'hoant Jean-Claude Le Ruyet da zegas bourd ha fars dezho dre hentoù nevez. Mod-se eo e voe ganet e zastumad *Feg-niouz*. N'eus penn na lost d'ar pennadoù berr a vez kinniget deomp gant an aozer. Heuliañ a ra kamdroioù e awen, digabestr ha bagol, etre tezennoù taolioù-santel ha fablennoù prederouriezhel... Ur veaj divevenn en egor hag en amzer, leun a souezhennoù. Ur c'huzul a rafen a-walc'h d'al lennerien evit adkavout spered ar gronikenn-mañ : lenn ur pennadig maremare, ha nompas en un tenn.

Spontailh al livioù,
gant Anna Llenas,
bzhg gant Mark Kerrain,
TES,
48 pajenn, 12€

Spontailh al livioù, aozet gant Anna Llenas, un arzoerez a Vro-Gatalonia, a zo ul levr kaer gant ur bern livioù aozet evit sikour gant ar vugale da soubañ

Annez e vo torret ar strobinnell, 'm eus aon... Yac'h eo yezh Jean-Claude Le Ruyet hag aes da lenn evit an holl, goude ma vez liv ar gwenedeg warni. Da-heul kement chabistr e vez kinniget ul listenn gerioù ha troiennoù nebeutoc'h anavezet, en doare ma ne vez morse kollet al lenner. Ober a ra an aozer gant ar reizhskrivadur en deus displeget e ziazezoù ha difennet e reizhpoellegezh¹ en e levrioù kent : *Bien prononcer le breton aujourd'hui*² ha *Le breton : des dialectes à la langue écrite*³.

MBdB

1 Bien-fondé

2 Skol Vreizh, 2012


3 Albert Boché & JC Le Ruyet, Skol Vreizh, 2019.



e bed o zrivliadoù hag o frommadennoù (al levezeg, an dristidigezh, ar gounnar, an aon hag ar sioulder).

TH

**Anna Vreizh, Itrikoù
er c'hastell,**
gant Cédric Tchao,
bzhg gant Maguy Kerisit,
TES,
216 pajenn, 12,95€



Setu ur manga skrivet ha treset gant Cédric Tchao diwar-benn ur briñsez dibar he flanedenn : Anna Vreizh.

Gael, ur c'hrennard o wela-denniñ Kastell an Duged e Naoned a vo kaset gant ur c'hor-

rigan er Grennamzer d'ar mare ma voe ganet Anna Vreizh. An teuliad istorel e fin al levr a zo bet skrivet gant Aurélien Mosca. Lakaet eo bet ar manga e brezhoneg gant Maguy Kerisit.

TH

**Israël/Palrestine,
Anatomie d'un conflit,**
gant Thomas Snégaroff ha
Vincent Lémire,
Les Arènes ha France Inter,
132 bajenn, 17€



E niverenn 466 *Al liamm* e oa bet meneget levr Gérard Araud, *Israël Le piège de l'histoire*. Levr un diplomat eo. Gant ar perzhioù mat ha fall a c'heller gortoz eus seurt oberenn. Setu ul levr disheñvel-mik, bet embannet n'eus ket pell zo war un danvez a zedenn hag a drubuilh kalz tud


er mare-mañ. Ul levr bet savet gant daou istorour, azasadenn ur gaozeadenn bet etrezo er radio. C'hwec'h abadenn a bemzek munutenn pep hini evit stourm a-enep d'ar rakvarnioù diwanet diouzh ar from goude lazhadeg ar 7 a viz Here 2023 hag a-enep da zik-touriezh an amzer “verr”.

Ar bloavezh kentañ meneget eo 1876 ma vez embannet ar c'hentañ kelaouenn palestinat divyezhek (en arabeg hag e turkeg). Kavout a reer goude, evel-just, miz Eost 1897 ma vez aozet e Basel e Bro-Suis ar c'hentañ kendalc'h sionour gant Theodor Herzl. Hir eo istor an enebiezh etre Yuzevien ha Palestinianiz eta ha don he gwriziennoù. Savet eo an oberenn evel ul levr skol, pennadoù berr ha sklaer, arroudennoù tennet diouzh dielloù, buhezskridoù berr tudennoù

pouezus, displegadennoù evit ar gerioù dianav, kartennoù, stlenngraferezh... Ur benveg dispar evit diazezañ e soñj war fedoù. « 2007 vers le chaos » eo titl ar rann ziwezhañ. N'eo ket gwall galonekaus. Evit reiñ un tamm spi e veneg an daou aozer e « troioù gwidre an istor » o deus diskouezet e c'helle darvoudoù zo kaout disoc'hoù dic'hortoz. N'eo morse skrivet ar pezh a c'hoarvezo.

HL

Barzhaz Breizh,
gant Kervarker (Hersart de
la Villemarqué),
Yoran embanner,
438 pajenn, 25€



N'eus ket ezhomm da zisplegañ petra eo *Barzhaz Breizh*. Marteze e oa ret adembann ur stumm divyezhek. N'ouzon ket. An destenn c'hallek a seblant bezañ hini embannadur 1867 bet savet gant Kervarker. Meur a abeg zo da vezañ souezhet gant an hini vrezhonek. Perak ne 'm eus kavet meneg ebet eus

al labour graet gant Kerlann, Roparz Hemon, Maodez Glann-dour ha Per Denez evit lakaat ar skrid « en ur stumm helenn o klotañ gant yezh ha skritur hon amzer » (rakskrud gant Per Denez evit an destenn bet embannet e 1988 gant *Mouladurioù Hor Yezh*) ? Memes testenn eo war-bouez un nebeud

“reizhadennoù”. Perak kinnig e komz plaen ar pezh a oa kinniget gant Kervarker e gwerzennoù ? Perak lakaat ar skridoù-sonerezh er fin, evel en embannadur 1867 met skarzhañ daou-ugent anezho ? Ne ’m eus kavet displegadenn ebet evit an dibaboù-se.

Petra soñjal ? Ne seblant ket gwall sirius al labour daoust d’al levr bezañ kinniget brav. Ma laka tud zo da zizoleiñ obereñ Kervarker e vo pardonet, koulskoude.

HL

**Ce que je leur dois,
Va zud kozh,
gant Yannick Bigouin,
Skol Vreizh,
151 bajenn, 13€**



Anavezet mat eo Yannick Bigouin e-touez ar c’hevredigezhioù e Breizh peogwir ez eo Dileuriad rannvroel luskad kevredigezhioù Breizh (*Délégué régional du Mouvement associatif de Bretagne*). Anavezet eo ivez e bed ar re a stourm evit ma c’hello Breizh bezañ mestr war he dazont. Bet eo bet kuzulier Rannvro (EELV) hag eilmaer e Plougerne. *Ce que je leur dois* zo dedennus e meur a geñver. Da gentañ ez eo un testeni leun a deneridigezh eus al liamm en doa gant e dud-kozh, hag a zo

ivez ur preder war an treuzkas. D’an eil ur sell war gemmoù ar gevredigezh en ul lodenn eus Bro-Leon e-kerzh an XX^{vet} kantved. Mesket eo an daou evel-just rak buhez e dud-kozh a zo enkorfadur ar c’hemmoù-se. Lakaat ar ra santout an traoù kentoc’h eget displegañ anezho.

Adkavet em eus traoù bet bevet ganin en ur stumm all rak dishañvel-mik eo istor ma familh. Traoù bet kemeret pe bet bevet pa zeuen da dremen ma vakañsoù hañv e ti ma zud-kozh etre fin ar bloavezhioù 50

ha penn-kentañ ar bloavezhioù 70. Souezhet brav on bet o teskiñ e oa mamm-guñv Yannick brudet evit he ferzhioù a amiegezh (p.36) pa oa brudet-kaer ma hini (Mai Pipi-Gaezh, aet da Anaon e 1951) evit ar memes abeg. Un heklev a gav testiñ Yannick em eñvorennoù. Ne zlean ket bezañ ma-unan. Emdroadur al labour-douar, an darempredoù etre ar renkadoù, pouez ar relijion, ar vuhez familh, skouer tud a oar chom sonn daoust da ziaesterioù ar vuhez.

Gwask ar relijion a seblant gwashoc'h evit ar pezh a veze bevet e Bro-Dreger d'ar memes koulz. Menegiñ a ra an aozer « *la pastorale de la peur* », p.121. Ali on gantañ betek en em c'houlenn pelec'h e oa ar gristeniezh hag an Doue a garantez en afer... Reiñ a ra Yannick ur plas bras d'ar brezhoneg. Unan eus lodennoù a bouez war an treuzkas, treuzkas ur sevenadur hag un identelezh.

Ul labour a etnologiezh diazezet war vuhez wirion ur familh hag un darempred don etre ur mab-bihan hag e dud-kozh. Meskaj brav.

Meneget em eus ar relijion hag ar brezhoneg. Diaes eo din

chom hep menegiñ div souezhadenn fentus. E-keñver relijion em eus dizoloet ur santez nevez p.117 : Thérèse de Lourdes ; nemet e fazifen evel-just... E-keñver brezhoneg em eus kavet iskis troidigezh « Amañ emañ an amann, mamm » (p.26) a dalvez em bro « *Le beurre est ici* » o respont da « *Pelec'h emañ an amann ?* » ha n'eo ket « *Ici il y a du beurre* » a vefe « Amañ ez eus (zo) amann ». Ra vo pardonet goaperezh un Tregeriad.

HL

**Noms de lieux bretons
de Haute-Bretagne,**
gant Jean-Yves Le Moing,
Yoran embanner,
493 pajenn, 24€




Ur pezh mell labour eo an hini bet kaset da benn gant Jean-Yves Le Moing a-drugarez d’e ouiziegezh e-keñver yezhoniezh met ivez d’e varregezh war ar stlennouriezh. Danvez tezenn bet soutenet gantañ e 1988 e Skol-veur Roazhon 2 Breizh-Uhel. Ouzhpenn 500 anv-lec’h en deus studiet war un dachenn ma ’n em vesk levezoniou ar predeneg, ar galianeg hag ar gallo-romaneg. Un diazez skian-

tel evit gwelet emled ar brezhoneg betek Liger-Atlantel peurgetket hag an doare m’en deus kilet tamm-ha-tamm. N’eo james ar fedoù ken eeun hag a gred da dud zo. Lâret « Morse n’eo bet komzet brezhoneg amañ » a zo gwall arvarus hep studiadenn resis. Ul labour a bouez eta. Ur vammenn a ditouroù a c’heller tañva d’e lusk...

HL

NOTENNOÙ



**Anna KERVELLA,
Tudual HUON,
Herve LATIMIER &
Riwanon KERVELLA**

HOR MIGNONED

Kañv :

Tremeur Bruno Moreau de Bellaing a zo aet da Anaon d'ar 15 a viz Gwengolo 2024 e Sant-Brieg d'an oad a 89 bloaz. Mab e oa d'an itron Vefa de Bellaing.

E 2021 en doa roet dornskrid eñvorennoù e vamm diwar-benn he beaj en Iwerzhon er bloavezhioù 50, bet skrivet ganti e galleg. Troet int bet e brezhoneg gant Riwanon Kervella hag embannet a-dammoù er gelaouenn *Al Liamm* adalek 2022.

Aet eo Marcel Maudire da Anaon d'an 31 a viz Here e Brest d'an oad a 73 bloaz.

Kabiten a vor eus e vicher e oa tostaet ouzh ar brezhoneg pa oa aet war e leve. E 2016 en doa savet ur c'heriaoueg teiryezhiek embannet e ti *An Alarc'h : Mor ha bagoù - Mer et bateaux - Sea and boats*.

PROFOÙ

Miz Gwengolo : Youenn CALONEC ; Loic CAMPION ; Goulven DONVAL ; Michel GOUEZ ; Daniel CARRE ; Pêr DREZEN ; Pieig AN DIGERC'HER ; Lucien NOZZI ; Glaodig LIABEUF-LE MAGUER ; Michel LE ROY ; Serge AUBIN ; Bernez TANGI ; Marcel DIOURIS ; Kristen AL LAE ; Gilbert KEROUANTON ; Michel LESCOP ; Alan ER HOULVENN

— War un dro : 435€

Miz Here : Armel LE SEC'H ; ARVALIEN ; Thierry MADEC ; Jean-Yves LE GOFF ; Gérard MEREL ; Anna an DUIGOU ; Gwenael BARON ; Tremeur GUILLAUMIE ; Yann-Loeiz KABELL ; Padrig AN HABASK ; Daniel KERNALEGENN ; Robert PERROUD ; Jeannot FLAGEUL ; Lan TANGI ; Jean-Yves KALLAG ; Kuzul ar Brezhoneg

— War un dro : 198€

Miz Du : Fañch JESTIN ; Gwendal DENEZ ; Jakez MEREL ; Jean CLOAREC ; Jean-Claude LE BARBIER ; Alain JOIN ; Yann AN AOD ; Celestin ha Mari-Jo LE ROUX ; Iwan COUEE ; Eric CHEVALLIER ; Filip OILLO ; Dr Yves GOURVES ; Alan MARTEL ; Jean OLLIVRO ; Fulup KADORED ; Gwenole BIHANNIG

— War un dro : 445€

*Mil drugarez a lavaromp ur wech ouzhpenn
d'hor skoazellerien.*

LIZHIRI

Digant Dominique Allain :

Plijadur am eus bet hag am eus c'hoazh é welet ma danevellig
« Eûruzamant ec'h eus tud da ziwall hon bed » embannet geneoc'h

e-barzh an niverenn diwezhañ-mañ. Me a soñje genin e oa kouezhet en ankoua da vat (pe da fall). Ma.

Neoazh em eus kavet enni un nebeud traoù farius, doc'h ma meno-me.

p.15 : en diaz, ur “resisadenn” : he daonter : *sa moitié* - lakaet em boa furm ar gwenedeg-izel : daonter = danter - ma digarezit evit ar fari-se ; met “tablier” (tavañjer) eo ster ar ger (un dave e oa da lavarou zo evel « Ema he danter é sevel » evit un dougerez...).

p.18 : memes evezhiadenn : bezivet : brevet - evidon ema ster ar ger kentoc'h : abafet ha souezhet.

er memes pajenn, uhelikoc'h ema bet skrivet « dredeged » e-lec'h “dredeged” (ù-koukoug ?).

p.19 : linenn 16 : « en ur dale a... » gwell « en un dale a... » (ù-koukoug ?).

Setu, n'eo ket kalz a draoù. Mar gellit embann an difariadennoù-se un deiz bennak e vin e barr ma levenez (!)...

Kendalc'hit get ho labour ha kourajit.

KOLIER AN ERMINIG

D'an 13 a viz Du 2024 eo bet roet Koler an Erminig da brezidant Iwerzhon, Michael D. Higgins, gant Lena Louarn, kañsellerez Bodad an Erminig.



©Troy Maxwell - Tarzh : abp.bzh

Al lid a oa dalc'het e Áras an Uachtatáin, ti annez ofisiel ar prezidant e Dulenn.

Kemer a rae perzh el lid ivez prezidant Kuzul rannvro Breizh, Loig Chesnais-Girard ha kannadez Bro-C'hall en Iwerzhon Celine Place.

Souezhus-bras eo ne vefe ket bet pennadoù e galleg e kelaouennoù ar vro amañ e Breizh, daoust d'ar gelaouennerien bezañ bet pedet koulskoude da vont da Zulenn evit an degouezh.

PRIZIOÙ _____

Priz Langleiz :

Roet e oa bet priz Langleiz 2024, da-geñver Gouel al Levrioù e Karaez, da Loeiza an Duigou evit *Tan de'i* ha *Kali Torrdent*, daou romant evit ar grennarded bet embannet gant *Al Liamm*. Un degouezh a zoare pa oa dodenn ar gouel er bloaz-mañ « lennegezh evit ar re yaouank ».

Evelyne Brisou-Pellen a oa ar brezidantez er bloaz-mañ ha dres war stand *Sav-Heol* e c'helled prenañ ul levr bet skrivet ganti ha bet lakaet e brezhoneg gant Mark Kerrain : *Brasañ sotoni ma buhez* (gwelet ar pennad-barn e lodenn *Petra nevez* ?).

Priz danevelloù Kêr Garaez :

Ar priz kentañ a oa aet gant Patrice Marquand evit un danevell bet embannet er gelaouenn *Al Liamm*, niverenn 464 : *E kambr ar skrivagner*.

Priz Sten Kidna :

Priz Sten Kidna a zo bet roet d'ar romant *Kañv ha diskañv* bet skrivet gant Iwan ar Fur hag embannet gant *Al Liamm*.

Gourc'hemennoù dezho holl !

KENSTRIVADEG TI AR VRO KEMPER _____

Kregiñ a ra ar bloavezh-skol 2024-2025 gant lañs ar pevare kenstrivadeg danevelloù e brezhoneg. Ti ar vro Kemper a ginnig ur gejadenn digoust a c’hello kemer perzh enni, skolidi, skolajidi, liseidi hag an dud en oad evit eztaolañ diwar-benn tem « Ar mor-bras ». Ar skrid, 7 500 arouezenn dezhañ d’ar muiañ (evit ar skolidi) ha 10 000 arouezenn dezhañ d’ar muiañ-tout (evit ar skolajidi, al liseidi hag an dud gour), a zo da vezañ kaset **d’an diwezatañ d’ar Gwener 28 a viz C’hwevrer 2025, a-raok hanternoz**, dre bostel, d’ar chomlec’h : clelia@tiarvro-kemper.bzh.

Roet e vo ar prizioù evit an danevelloù dibabet d’ar Gwener 28 a viz Meurzh 2025, da 10e vintin, e Mediaoueg Alain-Gérard, Reper Julien Gracq 29000 Kemper.

Reolennaoueg ar genstrivadeg a gaver war lec’hienn internet Ti ar Vro Kemper : tiarvro-kemper.bzh

Darempredoù ha titouroù : Ti ar Vro Kemper | clelia@tiarvro-kemper.bzh | 02 98 90 70 43

KENSTRIVADEG UNVANIEZH SKRIVAGNERIEN BREIZH _____

« Un emgav a oa bet divizet ganeomp en ur preti-karter bihan a oa bet darempredet ganeomp e-pad hor studioù, met... goude kement a vloavezhioù hep keloù... » Awenet oc’h gant an dodenn-mañ ? Neuze, bizkrivit un danevell (div bajennad brezhoneg saourus enni) ha kasit anezhi deomp (war baper hag e stumm ur restr) **a-raok an 31 a viz Meurzh 2025**. Evel bep bloaz e vo roet tri friz en enor d’ar skrivagner Pêr-Jakez Helias e Ti al Levri, e Begerel. Embannet e vo an holl zanevelloù plijus bet degemeret en un dastumadenn, gant un droidigezh c’hallek hag ur skeudenn. A-gevret e vo danevelloù gallaouek hag ar re c’hallek.

Titouroù resis a vo kavet war al lec’hienn ecrivainsbretons.org.
Thierry Châtel,

kadoriad juri brezhonek Skrivagnerien Breizh, Garzh al Laour
bras, 22780 Logivi-Plougras.
thierry.chatel@laposte.net

DIV DELWENN E KARAEZ

Fromus-bras eo bet al lid evit reiñ enor da zaou zen meur a Vreizh. Div zelwenn nevez a zo bet staliet war blasenn Aiguillon, plasenn an ti-kêr, e Karaez. Div zelwenn bet savet gant Annick Leroy. Anjela Duval a zo o skrivañ, staliet ouzh un daolig, unan eus he chas kluchet en he c'hichen. Bastian ar Balp, stourmer kalonek a-enep da zivizoù direizh roue Frañs Loeiz XIV, a zo leun a startijenn, prest da gas an dud wasket war e lerc'h gant ar Bonedoù Ruz. Diskoachet eo bet an div zelwenn mouchet gant ar gwenn-hadu gant Christian Troadec, maer Karaez, Mélanie Thomin, kannadez ha Didier Guillon, besprezidant departamant Penn-ar-Bed. Unan eus barzhonegoù brudetañ Anjela Duval a zo bet skignet, « Karantez Vro » kanet gant Nolwenn Leroy. Un enor dibar eo a zo bet lidet da zaou stourmer breizhat d'ar Sadorn 9 a viz Du e kêrbenn ar Poc'her.

LEVRAOUEG KAWAN

Divizet eo bet gant Kuzul Departamant Aodoù-an-Arvor serriñ al levraoueg staliet e Ti ar Vro e Kawan e miz Gouere 2025. Nive-rus-bras e oa an dud en em gavet e sal Gouelioù Kawan evit lâret nann da seurt diviz. War-dro 32 000€ e koust al levraoueg bep bloaz. A bep seurt tud a zo a-enep-krenn da seurt diviz, kevredigezhioù, dilennidi, tud ar vro... Lennerien a zo enskrivet (ket a-walc'h hervez an Departamant) hag ingal ez a di klasoù divyezhek. Dielloù, pladennoù, levrioù, DVDoù a vez kavet eno, levrioù kozh ha rouez ivez. Kalz tud a zo mennet evit ma chomfe digor al levraoueg ha miret e Kawan.

KENSTRIVADEG AN ERMINIG HELAVAR _____

Evit an eil gwech eo bet aozet gant eil derez Diwan ur genstrivadeg evit liseidi an eilvet klas. Aozet eo bet e skolaj Gwened d'ar 16 a viz Here. 12 lisead o deus kemeret perzh, bez' o doa da gomz diwar-benn un dodenn bet dibabet gante, e-pad 5-10 munut. 6 lisead a zo aet ar maout gante. Dalc'het kont en deus ar juri ouzh kalite yezh, arguzennoù, emzalc'h ha mouezh ar berzhidi yaouank.

LA CAISSE À OUTILS DU PARENT NON BRETONNANT _____

N'eus ket kalz a vrezhonegerien ha n'anavezont ket kerent nannbrezhonegerien a fellfe dezho gellout kompren ar pezh a ra o bugale er skolioù dre soubidigezh pe divyezhek. Kuzul Skoazell skol Diwan Sant-Brieg en deus krouet ur benveg evit tizhout ar pal. Anvet eo *La caisse à outils du parent non bretonnant*. Ul levrig 63 fajenn kinniget brav. Kregiñ a ra gant istor berr ar yezh hag ur sell war ar yezhoù keltiek. Goude e kaver an ostilhoù evit kompren perzhioù pennañ ar yezh. N'eo ket ken diaes ha ma kreder... Er rann-se ez eus ur pennadig evit deskiñ klask ur ger er geriadur. Hegazus e c'hell ar c'hemmadurioù bezañ !



Rolloù gerioù a zeu goude a-zivout ar brezhoneg er gêr hag ar brezhoneg er skol. Pouezus ! Un nebeud rimadelloù ha krennlavarioù evit echuiñ hag ur roll chomlec'hoù evit deskiñ brezhoneg...

Talvoudus, sklaer ha marc'had-mat : 13€ an tamm ! Ma ne gavit ket en ho stal levrioù karetañ, goulennit digant :

Kuzul Skoazell Sant-Brieg

Ti ar Vro-l'Oté

138 straed al Lege

22000 Sant-Brieg

skoazelldivansb@gmail.com

Da vrudañ ar muiañ posupl !

BREZHONEG ER RADIO ? _____

Un teuliad a-feson skoazellet gant prezidanted 5 departamant Breizh, kannaded ha senedourien ar vro, a zo bet kaset d'ar blotoù : hini ur radio e brezhoneg penn-da-benn.

Setu diviz an ARCOM (*Autorité de Régulation de la COMMunication audiovisuelle et numérique*). Gwagennoù skignañ nevez a veze kinniget e Breizh. Un digarez brav evit lakaat ar radio e brezhoneg da vont war-raok. Blev ! D'ur radio a skign jazz eo bet roet an aotre. Peadra da vezañ mantret ha fuloret. An dilennidi, war an dachenn, ne vezont na selaouet na doujet, eme Alan Kloareg, prezidant Radio Breizh.